

Le Garrec (Hollsent, Reun Mari ar Garreg)

Kergrist-Moélou, 1862 – Montroulez 1939)

Ar vezventi. Bet embannet e 1901. Daou skrid a zo ; uann e brezoneg, an eil e galleg.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Faziou kemmaduriou ha reiz ar gerioù a zo. Reizet int bet.

Kemmeska a ra an tregerieg hag al leoneg (gwechou ‘zo e ra ar hemmadur D/Z, gwechou all ne ra ket- Adlakaet eo bet ar hemmadur-ze). Ober a ra gand an tregerieg –**añ**, pe al leoneg –**a** e dibenn gerioù ‘zo.

Ar vezventi

En tri arvest

Ar c’hoari en em zalh, penn-da-benn, en ti Fañch ; netra war al leur-deatr, nemed eun daol, peder hador, eur podig houarn, teir skudell, gwer hag eur voutaill ; eur penn-baz a vez ezomm ivez war an diwez. War ar speurinier e hallo bezañ pintet daou wele-kloz gand bankou-toser, hag eur veselier, sort a weler war ar mêz ; hag ivez eun olaed ledan, gand eur pezh mantell wenn a-uz dezi.

C’hoarierien

Fañch, kouër en e dra.

Marhared, e wreg.

Kaour-Vraz, tad Marhared.

Benead, mab Fañch ha Marhared.

Bastien, ostiz.

Mon-Goz, sorserez.

An Aotrou Roparz, marhadour ed.

Daou archer.

Arvest kenta

Kenta pennad

Fañch ha Marhared

(Eur zon biniou a glever o pellaad)

Marhared

Den ebed ken war-dro ; setu-ni on-unan,
Fañchig ! Klevet az-teus ‘dreg al “Liorz Gwenan”
O vervel diweza kimiad ar biniou ?

Fañch

Ya ; mez, pa dav an trouz, e kan an eneou ;
Pa deh an dud, e chom ganem on harante’ ;
An devez deh, koantig, eo bet ar haerrañ dé’
Savet a-zioh va fenn abaoe ma’z on ganet.

Marhared

Mad ! hen anzav a rin, bremañ p’om unanet :
A-vihanig, a-geid am-eus anaoudegez,
‘Oa ganit va huñvre, ganit va hoantegez ;
Ha war va flanedenn ne oan ket faziet
P’am-eus bet, Fañchig kêz, ‘hanout-te da bried.

Fañch

Ha me, va ferlezenn, an deiz ‘m-oa da gavet,
‘Oa ‘kreiz al lanneier o tiwall da zeñved,
Da vouezig o sevel ken flour ‘trezeg an neñv¹,
Da zremm ken dudiuz, ma seblante ‘kane²,
Kleved kan eun Êlig e baradoz Doue !
Ha bremañ, p’am-eus bet, eurusoh ‘vid roue,
Eun teñzor ken dispar dre zouster an eured,
Te ‘vo, Marharedig, enoret ha karet,
Sort na vo bet biskoaz gwregig war an douar,
N’am-eus ken er bed-mañ tad na breur, mamm na c’hoar ;
‘Deuz va oll gwalleuriou te ‘zigollo ‘hanon.

Marhared

Ya, me da luskello kuñvig war va halon,
Hag a briento dit eurvad ha plijadur
Da yac’haad ar gouli greet gand an Tonkadur !

¹ an neñv : distaget “an né”.

² ‘kane : e kane.

Eil pennad

Fañch, Marhared, Mon-goz

Mon-goz

(en eur zond a-daol war an teatr, hag en eur hoarzin skiltr).

A ! A ! A ! A ! A ! A ! Daoust piou 'hallfe yac'haad
Gouliou ar vuhez ? Te 'rafe ar marhad,
War digarez out koant, yaouank ha pinvidig,
Da baread poaniou eur galon reuzeudig ?
Re vihan out, kêzig ; eno 'vefes trehet.
Sell eun tamm ouzon-me, koz gwezenn dizehet,
Ne oufen ken ober an disterra bale
Heb na zav war va lerh goapadeg bugale :
« Torte ! », du-mañ, « tortez », du-hont, « tortez », atao.
Me 'zo bet, koulskoude, 'veldout yaouank ha brao :
Din-me, pa dremenen, 'vije an oll zellou,
Muzellou ruz 'zo bet poket d'am muzellou,
Kinniget zo³ bet din kement tra a garfen...
Ha setu-me torret va horv, kozet va fenn,
Bruzunet va halon ; diwall ouz kemend-all !

Fañch

Hent ar vuhez, Mon-Goz, me 'oar eo eun hent dall ;
Ni 'boanio da vale gantañ deuz on gwella,
Ha da zalhen war-eeun beteg ar penn pella.

Marhared

(en eur rei daou wenneg d'an hini goz)

Dal't, Mon, pedet⁴ 'vidom e-leh taol malloziou :
D'ar halonou poaniet madelez 'zo louzou.

Mon-Goz`

(etre he dent, 'n eur vond e-mêz)

Daou wenneg ! Marteze 'devo ket atao de rei ;
Rod ar binvidigez 'zalh noz ha deiz da drei.

³ zo : tregerieg ; eus.

⁴ pedet : tregerieg ; pedit.

Trede pennad

Marhared, Fañch

Marhared

He homzou droug, Fañchig, a drubuill ahanon,
Gand eur ger eo mouget levezet va halon !

Fañch

Perag, va haredig ?Eur wrañh koz divalo
'Reno, gwaz dit, ar bed gand he geriou goullou ?
Doue hepken emañ pep tra 'tre e zaouarn ;
P'on-deus furnez a-walh on-daou d'en em houarn,
'Hellom bale, dineh dre hentchou ar vuhez,
Ha respont d'ar sort tud gand eur zell a druez.
Eur helou a-zoare 'lavarin dit bremañ :
'Vid na ouelo biken al lagadigou-mañ,
(Pokad a ra d'he daoulagad)
'Vid ma vo d'eurusted ar vrasa ma hellin,
'M-eus aliet da dad da feurmi e vilin,
Ha da zoned amañ ganem-ni da veva.
Mez petra ? Kement-se 'lak 'hanout da leñva ?

Marhared

Ya, gand ar blijadur da gaoud eur gwaz ken mad,
A oar lenn em halon pep c'hoant ha peb mennad !
(En eur hoarzin).
'Velkent, e rankan dit ober eur rebechig
Da vezañ beteg-henn kuzet ouzon, Fañchig.

Fañch

Mar 'mije gallet koach eun tammig pelloh c'hoaz,
'Vije erru da dad 'raog ma ouejes biskoaz ;
Rag hen kleved a ran 'tigeri an nor-dal.

Pevare pennad

Fañch, Marhared, Kaour-vraz

Kaour-vraz

(*en eur starda dorn Fañch ha pokad d'e verh*)

Deuz ma welan, amañ 'oa den ouz va gedal.

Marhared

Eo, va zad, klevet 'zo lod euz ar wirionez ;
An dilerh a glevin ganeh-c'hwi, aotrounez.
Laret din, da genta, penaoz ho-peuh⁵ gallet
Distrei ken prim, pep tra 'n eun devez ingalet ?

Kaour-vraz

A ! va faotrezig kêz, evid bete bremañ,
N'ouzout ket pesort den kaloneg 'zo amañ :
Divizet 'n-oa ouzon, eur miz 'raog an eured,
'Vid kas diwar da dro poan-galon, keun⁶-spered,
'Vid diwall euz peb mên da dreidigou tener,
Rankchem on-daou bale ganit, 'vel daou rener,
War hent-braz ar vuhez, hag ober euz da di
Eun neizig alaouret !

Marhared

O ! gwas⁷ komplidi⁸

E-nao 'eneb din-me ho kalon savet !

Kaour-vraz

Heulia n'am-eus greet ken ar pez e-noa kavet
Da waz karantezuz, skwer vad ar vibien gaer,
Eur merour, plomm a-walh, a zo du-mañ en kêr,
Ar Robig, kreñv 'n e stal, erru dezañ c'hweh paotr,
'N-eus sammet va milin war an oll dichipot.
Va loened 'zo gwerzet 'tre an amezeien ;
Traou an ti, ar re⁹ 'dalv nebeud a wenneien,
Am-eus lezet e-barz, m'o havin adarre,
Ma tigouez deoh skuiza ganin war ho korre.

Fañch

Me ne skuizin biken gand an neb 'n-eus savet
Eun durzunell ken koant da lakaad em haoued,
Eul lili gwenn ken glan evel va haredig ;
Va zad a rin bepred euz tad Marharedig.
(*Tri daol a skoer war an nor*)
Digorit ! Daoust piou 'hall 'n em gaoud e toull an nor ?

⁵ ho-peuh : tregerieg : ho-peus.

⁶ keun : keuz.

⁷ gwas : tregerieg : gwasad.

⁸ komplidi : iriennou.

⁹ ar re pere, er skrid orin.

Pemped pennad

Fañch, Marhared, Kaour-Vraz ; Bastien

Bastien

(en eur blega izel e benn)

Itron hag aotrounez, bezañ 'm-eus an enor
D'ho saludi gand forz doujañs ha levez.

Fañch

Demad dit, Bastien ! Petra zegemennez ?

Bastien

Da genta, me ho ped, aotreet ahanon
Da starda dorn leal Fañch, va hosa migon.
(Starda 'ra dorn Fañch).
Ken liez gwech, tud kêz, ma krogan en dorn-ze,
An amzer dremenet em halon a gaoze :
Unanet om-ni bet a-viskoaz, adaleg
'Oam euz ar memez taol o teski ar galleg.
Beteg an deiz ma oam asamblez deut en-dro,
Kaporaled lorhuz, dimeuz servij or bro.
En em heuliet ombetpenn-da-benn on deizioù ;
On eurejou zoken, koulz hag on dimeziou,
Ne oa ken etreze nemed pevar devez,
'Vel pa vijem atao on-daou war evez
Na rafem netra 'bed an eil heb egile.

Fañch

Hag ah out deut neuze d'ober eun dro vale
Da di ar honsort koz ? Mad ! Bastien, aze' :
(Azeza 'reont o-févar)
Eur banne jistr bennag a zo c'hoaz dre aze ;
Va zad-kaer, eveljust, 'zikouro hen tañvaad,
Rag va Marharedig ne raio ket, moarvad.

Marhared

O ! nann, Fañch : goud a rez n'on ket evid eva.
(Fañch ah a da glask jistr, Marhared a lak gwer).

Kaour-Vraz

N'eo ket ar bannahou 'lak an dud ar hreñva.

Bastien

Evid gwir, Marhared, hen anzav a ranker
O weled pegen drant ha livet pegen kaer
En em zalhet atao diwar an dour hepken ;
Mez eur gwaz n'hall ket chom heb eva eun dakenn
Eur wechig an amzer, d'ober 'vel ar re all.

Fañch

(karget gantañ ar gwer, ha krog en e hini)
Arabad eo, paotred, war ar zeh kaozeal :
Sachom war ar re-mañ, ma vo gwirroh a ze

Pez e oa Bastien o lavared aze.
(*Strinka a reont gand o gwer*)

Bastien

Yehed mad dit, Fañchig ! deoh, itron, ha d'ho tad !
Ra vo dindan eur bloaz tadig-koz leun a stad !

Kaour-Vraz

D'ho krasou mad ho-tri ! Ra briento Doue
Da bep hini 'hanom eurvad ha hir vuhe' !

Fañch

Yehedou ! ra vefom on-fevar diwallet
Da gaoud war an douar eur blanedenn galed !
Bremañ 'vad, a zo¹⁰ deut din da zoñj, Bastien,
Perag e tivennez ken stard an ostizien :
Klevet 'm-eus eh out eet d'ostiz daou zevez 'zo ;
Ha gwir eo kement-se, kuit a farserozo' ?

Bastien

Gwir-tre, Fañch ; ne oan deut zoken beteg amañ
Nemed 'vid ho pedi da zond ho-tri bremañ
D'ober d'am stal nevez eun tammig gweladenn.
Du-mañ ne'z aho ket paotred ar rouladenn
Da zebri 'n eun devez gonedigez eur zun :
Mez d'ar goz ostizien ar re¹¹ 'zach hag a zun
Digand ar micherour e hounezenn hag e wad !
Du-mañ ne deui ket, kennebeud, 'raog an oad,
Ar vibien da zispign arhant laeret er gêr ;
Du-mañ 'vo ket gwerzet ar bannahou re ger...

Fañch

Daoust ha te, Bastien, 'roio 'ne 'vid netra ?

Bastien

N'eo ket ar priz eo, Fañch, an danvez 'n hini 'ra :
Kerroh eo aliez daou wenneg evid tri.
Ne zalhin ket, te 'oar, ar sort gwin-ardant kri',
Gwin glaz, jistr badezet, loustoni a beb liou
A gaver peuruia 'barz an ostaliriou ;
Traou mad, a genta merk, ne zegemerin ken.

Kaour-Vraz

Na penaoz e ouezfoh, pa vo er varrikenn
Kuzet ha goloet, talvoudegez pep tra ?

Bastien

Diskouez a ret¹², Kaour-Vraz, ne intentez netra
'Barz ar sort ingaliou ! Anet¹³ eo an tier,
'Michañs ; c'hwi n'hoh-eus ket meur a wech en zeier
Prenet heb diskoulma, pe ed pe batatez ?

¹⁰ a zo : tregerieg : ez eus.

¹¹ ar re : pere, er skrid orin.

¹² ret : rit. Ober a ra gand an unander eun tammig pelloh.

¹³ Anet : anavezet.

Eur bakadenn vutun, eur voest alumetez¹⁴,
Daoust ha c’hwi o digor bepred a-raog prena ?

Kaour-Vraz

Furroh e vije din ober da vihanna.

Bastien

Ha c’hoaz, deuz peb evaj a-raog gwerza da vad
E kustumer degas eur bannah da dañvad ;
Piou bennag a zisvarn hanternoz deuz kreiste’
Biken ne vo flemmet.

Fañch

Neuze ‘n em lakez-te
Kalz gouiziekoh liper ‘vid na ve ar re all ?

Bastien

Eun dra, Fañch, en-deus pouez : ar pez ugent real.
Paea ‘vel zo dleet, eno ‘n hini ‘mañ ‘n dalh ;
Kalz ostizien, siwaz ! a vez stag dre o yalh.
Me, m’am-eus peadra da baea dre ma’h an,
A zoñj dibab atao peb gwellañ, peb yac’hañ ;
Gwin ruz tomm evel tan, gwin gwenn ken dous ha mel,
Chartreuz¹⁵ ha kurso, kalvados ha kummel,
Kognag bet meur a vloaz o flourad dre gozni,
Bier-bok alaouret a hwez-vad, ha vermout ha mader,
Kement ‘haller c’hoantad eva ‘raog ma preder¹⁶.

Kaour-Vraz

Ne oa ket, em amzer, ar sort traou er vro-mañ ;
‘Velkent, ‘vije¹⁷ debret kerkoulz evel bremañ.

Bastien

Lezom an amzer goz ‘leh m’emañ diskennet,
Ha gand an heol nevez bezom sklêrijennet :
Peb amzer a rank kaoud e giz hag e lezenn,
Ha beb eil eo dleet trei tu d’ar grampouezenn ;
Gwechall ar grampouezenn ‘ziskoue¹⁸ an tu seh,
‘Leh bremañ ‘vez lakaet tu an amann d’an neh.
Bernia, bernia bepred ne ree ket on zadou ;
Hirie, ‘rank an dispign mond da heul ar madou,
Anez, ‘ver badezet gand eun ano neve’.
Sed amañ, Fañch, dezañ kreñv da vil skoed leve,
Spered ha deskamant, teod lemm da gaozeal,
Kuzulier er barroz da houarn ar re all :
Hag eñ ‘vo kemeret, ‘gav deoh, ‘vid den ebed,
Mar ne oar ket ar pez a dremen dre ar bed,
Traou ar vro ‘n eur gonta gand an amezegez,
Hag an doareou pell dre an anaoudegez
‘Ro dem ar gazetenn ?

¹⁴ Eur bakadenn vutun, eur voest alumetez : eur bakadennad vutun, eur voestad alumetez.

¹⁵ Chartreuz : meur a ano boeson, e galleg, a zo da heul.

¹⁶ preder debri ar pred.

¹⁷ vije : veze.

¹⁸ ziskoue : ziskoueze.

Kaour-Vraz

Dond a reer d'o hleved,
'Michañs, hep klask an tu da vezañ peurvevet.

Bastien

Setu Kaour o kana, 'darre, war an ton koz !
Mezventi, foetadeg, n'am-eus gantañ ken kaoz.
Seblantoud 'ra dezañ gweled, evel gwechall,
'N o zav dirag o gwer, gwazed leun o vlejall,
Pep hini en e greñva, gand e gomz e-unan ;
Me 'lavar deoh, em zi 'vo ket evel-se, nann !
Rag mezuz eo kleved ar sort tud ;
Me n'andurin biken gopadeg na disput :
Peb ever 'vo lakaet d'azezañ deuz eun daol,
Roet dezañ e hoant, hag amzer d'en em daol
D'huñvreal pe da lenn, da gomz pe da hoari.
An oll gazetennou 'vo en ostaliri,
Gwer, glaz, ruz, gwenn, mesket, ma hallo peb lenner
Kemer sort a garo, 'n zougen divenner
D'ar mennoz 'gav dezañ a zo eeun ha gwirion.
A-daol-zur, pep hini a glasko e vignon,
Ha prestig 'vo gwelet bemdez, d'ar memez eur,
Oh erruoud eno, 'vel eur bagad breudeur,
Dibab an dud o-deus spered ha peadra.
Pegement e kousto ? – Koulz eo lared netra :
D'an hirra pemp pe hweh kweneg en eun devez.
'Vid eur priz ken dister, nag a dalvoudegez !
C'hoari, 'n em zidui, deski komz ha beva,
Ha, dreist-oll, bezañ sur a draou mad da eva ;
Ar spered hag ar horv laouennaet war eun dro,
Skwer vad evid an dud, eurusted 'vid ar vro !

Fañch

Eur prezeger dispar en-deus kavet ennout
Ar gwin hag an absiñt, ar "fin" hag ar vermout.

Kaour-Vraz

'Velkent, ne roio ket d'ar re fur da gredi
«'Mañ eursuted eun den o chom 'mêz deuz e di.

Bastien

An dro-mañ 'vad, Kaour-Vraz, n'ho tislavaran ket,
Rag me 'zo deuz ar gêr re bell 'zo dianket ;
Mez bremañ va zraou nevez : gwreg hag ostaliri.

Marhared

Me n'on ket evid mond, Bastien : rag va hoan
'Zo erru peurboent din he lakaad war an tan ;
Hogen, Fañch ha va zad, nebeud a bres warne,
A hall mond d'ar *Marh-Gwenn* da gemer eur banne.

Bastien

Sell 'ta ! gouzoud a rit an ano, Marhared ?

Marhared

Ya da : kleved a ran a bep tu lavared
Eo ken kaer tiegez 'vel ma zo bet biskoaz.

Kaour-Vraz

Mad ! nag e vije bet ugent kwech kaerroh c'hoaz,
Ne deufe ar *Marh-Gwenn* e-unan d'am bete,
Foeltr biken war e gein ne zavan-me fete'.

Fañch

An hent 'zo brao, va zad, hag ar bale 'zo berr.

Kaour-Vraz

N'eus forz ; gand ar Marh-se n'oufen krenn 'n em ober.
Leiz va ler am-eus bet euz a gement c'hoari
A gaver noz ha deiz 'barz an ostaliri.

Bastien

N'eo ket evelostiz ; vel mignon hepken
'N hini ho pedan, Kaour.

Kaour-Vraz

Laret am-eus : biken !
Hag e hadlavaran, rentet fur gand an oad,
En ostaliri 'bed biken ne daolin troad.
'Rabad eo, Bastien, heul tamm war va gorre.

Bastien

Heuliet a-walh am-eus, 'gredfen ket ober re ;
Mez Fañch,dampred e vin, 'deuio ganin 'velkent ?

Kaour-Vraz

Fañch a oar, koulz ha me, dre beleh 'mañ e hent.

Fañch

Ya, me 'h aio, kement ha kas 'hanout d'er gêr.

Bastien

Deus 'ta, pez ah-eus evet ne gousto ket gwall ger,
Peogwir me 'n hini a bae.
(*En eur zaludi*)

Kenavo deoh ho-taou !
Fañch, ma ne zistro ket, a zegaso kelou.

Fañch

Lezit ar goapaer-mañ ; ne vin ket diwevad.
Kenavo bremazon, Marhared ha va zad !

Marhared

Kenavo deoh ho-taou !

Kaour-Vraz

Kenavo adarre !
(*Bastien ha Fañch ah a kuit*).

C'hwehved pennad

Marhared, Kaour-Vraz

Kaour-Vraz

Setu aze, me 'gred, eur lampon a-zoare,
Ne oulfen ket fizioud va yalh-vutun ennañ.

Marhared

Souezet on, va zad : eun den deuz an eünnañ
'Glevan ober dre-oll gand Bastien Ar Prad,
Ha n'ouzon ket perag n'eo tamm 'bed deuz ho krad.

Kaour-Vraz

Te 'houl diganin-me perag ne garan ket
Eun den a beadra, hag a zo 'n em lakaet
A galon vad da ren ar vicher gaer ostiz ?
Kred ahanon, n'eo ket gand eur garg onestiz
'N hini chomo sahet e garr er skosellou :
Kaer 'n-eus ar mel bera dimeuz e vuzellou,
E lagad bezañ glaz hag e deod bezañ flour,
Gweled a ran, ken sklêr 'vel en eur melezeur,
O tispak e galon trubard ha didrue'.
Gwa d'an neb 'n em gavo war hentchou ar vuhe'
Dirag eur sort laeron, hir ha lemm o hrogou,
'Med e vefont kuzet dindan eur manegou !

Marhared

Eur gwall dant a viret 'eneb d'an ostizien
'Benn larda kement-se ar paour-kêz Bastien ?

Kaour-Vraz

Ya, va faotrez, eun dant ha na vreino biken.
N'am-eus kontet an dro, 'med d'az mamm baour hepken,
Doue d'he fardono ! Ar gentel 'oa kaled ;
Mez euruz on bet c'hoaz, peogwir am-eus gallet
'N em zigoll euz an tamm he-devoa koustet din.

Marhared

Kontit eta, va zad, e-pad ma prientin
Ar zoubenn evid koan, rag Fañch a vo laouen,
Oh erruoud er gêr, mar kav prest e zoubenn.
(Kerhed a ra eur podig-houarn ha teir skudell, hag en em lak da domma koan).

Kaour-Vraz

Ne oan ket eureujet tri bloaz 'med a-boan,
Pa zegouezas din mond gand eur marh hag eun oan
D'eur foar e Menez-Bre. Gwerzet mad 'oa 'ne ;
Ha, ganin em godell eun tamm brao a vone',
Pevar-hant skoed daou bez, gwenneg evid gwenneg,
'Oan o treuzi eur gêr, heh ano Lanvenneg,
Pres warnon o vale,, 'balamour e oa erh,
Pa glevis o hopal va ano war va lerh.

Me 'tistrei, hag o kaoud eno pevar mignon,
'N eun ostaliri gran, o hortoz ahanon.
Bannahou 'oa lipet muih 'vid nebeutoh,
Hag an erh gwenn mêz goueze bepred startoh,
Van ebed da guitaad : chom a rejom da goan ;
Ar bannahou, 'vel just, n'eh eent ket gwannoh-gwan ;
Kement ha ken bihan e teue noz du-dall,
Hag e oa 'r pemp konsort atao o turlutal,
Mezo evel pemp soner, leun a lorh ha fouge,
Pep hini diwar-benn an arhant a zouge.
Ar re all, tost d'ar gêr, ah eas gand o hent ;
Me, kalz pelloh, d'am zreid pa ne oan tamm perhenn,
Na d'am fenn kennebeud, a rankas chom va-un
'Barz an ostaliri, e-pad an noz, da hun.
O ! evaj milliget, pa zoñjan en dro-ze !...

Marhared

Gand ar pez ho-poa lonket 'oah bet klañv marteze ?

Kaour-Vraz

Nag e vijen maro, 'vije bet gwasoh.
Antronoz, goude 'm-oa kousket evel eur zoh,
En em gavas pounner va fenn ha skañv va yalh.

Marhared

Ha posubl eo, va zad, 'oa tud divez a-walh ?...

Kaour-Vraz

An daouzeg-kant deg lur 'oa tremenet a-biou,
Ha biskoaz deuzoute n'am-eus gwelet ar liou !

Marhared

Mez c'hwi ho-poa lakaet o hadklask koulskoude ?

Kaour-Vraz

Ya da, lakaet a-walh : 'pad tri pe bevar de'
'Oa bet dre Lanveneg barnerien, archerien,
O furchal heb ehan war-lerh va gwenneien ;
War-lerh e oant chomet ; ha c'hoaz, war va fe' dall,
Eh eas diganin tremen daou-hant skoed all
Da zigoll an aotrou ostiz, mar plij ganit,
Deuz ar pez 'm-oa lakaet anezañ da honid.
Set' aze an traou, va merh, hag a ra d'eur hovad
Dre gorzailenn eun den ober meur a dro vad.
Kaerroh 'zo : d'ar houlz-se ne oan ket pinvidig,
Ha da vamm baour zoken, a oa ken kizidig,
Doue d'he fardono ! a gemeras neuze
Eur boan hag eun anken, pennkirieg marteze
Dezi da vezañ marvet a-raog he zregont vloa'.
Daerou gwad a skuillis : re ziwezad e oa !...

Marhared

Ar blanedenn, va zad, a oa war ho korre :
'Vid bezañ eur wechig evet eur bannah re,
Hoh-eus gouzañvet stard ar walenn a gastiz.

Kaour-Vraz

Kement-se 'lak 'hanon, pa welan eun ostiz
O sacha tud 'n e di d'eva chopinadou,
D'ober em diabarz kalz a huanadou,
Kalz a zoñjou c'hwero war an amzer gwechall,
Ha dit e lavaran : « Diwall, diwall, diwall ! »
Da waz a zo eun den jentil hag eunn meurbed,
N'en-deus, ennañ kildro, pleg-fall na droug ebed ;
Klasket 'vo hen distrei diwar hent an dever,
Ha tammig ha tammig degas 'nezañ d'ever.

Marhared

'Se 'vad n'erruo ket : rag Fañch, dre hras Doue,
N'eus biskoaz implijet e gov d'ober koue¹⁹.

Kaour-Vraz

War an eva, 'teuer êz a-walh da reisaad²⁰,
Hag ar vezventi 'zo, siwaz ! eur si Breizad...
Ne gav ket dit, fenez, e chom pell da zale,
Goude 'n-oa ken d'ober 'med eun droig vale ?

Marhared

Bremañ, red eo lared, 'mañ ar houlz da dostaad,
Rag ar zoubenn 'zo tomm, hag en he gwella stad.
(Degas a ra war an daol an teir skudell gand loaiou).
Mar 'mije eur hlohig sort vez en tier kran,
Me a zonfe da Fañch doned timad d'e goan ;
Mez pardonet e vo 'vid an nozvez kenta,
P'en-deus ket c'hoaz desket ar houlz d'en em renta.

Kaour-Vraz

Boull eo ar re ah a war wellaad 'n eur goza...
A ! hen klevet a ran ; koulz eo din-me kloza
Va beg war va rebech.

¹⁹ d'ober koue' : kouez.

²⁰ reisaad : dond da veza reiz, da veza boaz.

Seizved pennad

Marhared, Kaour-Vraz, Fañch

Fañch

Nozvez vad deoh ho-taou !
N'oufeh biken soñjal pegen kaer eo an traou
Du-ze, 'ti Bastien.

Marhared

Kaer zur 'rankont bezañ
'Benn out manet ken all dirake d'azezañ.

Fañch

Petra ! bet on re bell ?

Marhared

Nann da, re bell ebed,
Fañch, peogwir ar zoubenn 'vid c'hoaz n'eo ket debret ;
'N em lakom deuzouti bremañ a galon vad.
(Pep hini 'grog en e skudellad)
Kenta koan greet ganin, Fañch, eh ez da dañvad.
Blazet eo deuz da hiz ?

Fañch

(Goude bezañ tañvaet)

Fe' ! 'vel-se, Marhared ;
Evid gwir, eun tamm pebr muioh 'mije karet.

Kaour-Vraz

Gwelloh pebret e oa bannahou Bastien ?

Fañch

Gwelloh teodet eo va zad-kaer 'vid na ouien.

Marhared

(en eur vousc'hoarzin).

N'it ket d'en em gregi dioustu da vihanna ;
Anez, ho koaniou paour 'chomo da zistana.
(Skei a reer war an nor).
Digorit ! Piou 'hall dond da skedi ken diwezad ?

Eizved pennad

Marhared, Kaour-Vraz, Fañch, Bastien

Bastien

Nozvez vad deoh ho-tri ! N'eo ket gwall deread
Deuz va ferz dond da glask eur servij d'an eur-mañ ;
Mez gouzoud mad a reen 'mije kavet amañ
Eun test a zo ezomm du-mañ war eur marhad,
Hag am-eus soñjet, Fañch, 'hallen dond d'az kerhad.

Fañch

Mad a rez, Bastien, lakaad fiziañs ennon,
Rag me ne lavarín biken : « Nann ! » d'eur mignon.

Marhared

Goude 'mañ noz, Fañchig, eh ez d'am huitaas c'hoaz ?
Bastien n'hallfe ket gortoz bete warhoaz ?

Bastien

Gortoz, Marhared kêz ! evid eur loen kezeg ?
Ya, ma vije marhad etre daou amezeg ;
Mez an daou gristen paour a zo tud euz a bell,
Greet o emgleo gante 'tond deuz foar Lomikêl.

Kaour-Vraz

Ar marhajou, gwechall, 'veze greet gand eur ger ;
Bremañ ne reer netra, pelloh, heb riñsa gwer.

Fañch

(en eur lakaad e skudell war an daol)

Deom dioustu, Bastien, d'ober on testeni,
'Vid na vo ket va zud re bell er velkoni.
Kenavo, gwreg ha tad ! hebdale 'vin distro.

Bastien

Kenavo adarre, ha Doue r'ho miro !

Kaour-Vraz

Kenavo !

Marhared

Kenavo !

Naoved pennad

Kaour-Vraz, Marhared

Marhared

C'hwi 'lavare, va zad,
Hag ar furnez ganeh, am-oa leh d'evesaad.

Kaour-Vraz

Gwelet az-teus aze pesort digarez skuiz²¹
'N-oa tennet ar beg mel 'vid kas Fañch war e giz ;
Prestig, ne wisko ket e borpant hep kaoud Fañch
Da zalhen ar goulou pe da gregi 'n e vañch.

Marhared

Ar pezh en-deus greet din, va zad, ar wasa boan,
'Oa gweled va fried o vouza deuz e goan,
Hag o senti muih ouz hennez 'vidouzom.

Kaour-Vraz

Euruz om, evelkent, va faotrez, pa ouzom
E peleh 'mañ an droug ; mad on-deus greet tevel,
Ha gortoz evid komz, heol warhoaz da zével.

Marhared

Gwall gri' 'mije kavet ivez, ma vije red
Kavoud kruz ouz va gwaz eil nozvez on eured...
Daoust hag-eñ n'eo ket prest c'hoaz da zistrei d'ar gêr ?

Kaour-Vraz

Goustadig ; lez ane²² da heul mod Landreger ;
Te 'oar e zo²³ eur hiz dispar o ren er vro :
Pe vez pevar ever, 'rank bezañ peder dro.

Marhared

Fe' 'ta ! ar paour-kêz Fañch a vo mezo-mik neuze ;
Rag tommet 'oa dezañ 'n eur erruoud aze.

Kaour-Vraz

N'eus forz : bezom didrouz on-daou evid fenoz,
Ha Doue marteze 'roio dem e vennoz.

Marhared

Me 'gred e tiwallo da zond biken d'ever
Eun den karanteuz sort eo Fañch em heñver.
Selaout : me anve trouz e dreid o tostaad.

Kaour-Vraz

Mad ! bezom war evez d'hen degemer gand stad ;
Gwall diwezad n'eo ket, pa n'eo 'med deg eur c'hoaz.
Chomom sioul !

²¹ digarez skuiz : digarez fall, ha koz.

²² ane : anezo.

²³ e zo : tregerieg : ez eus.

Degved pennad

Marhared, Kaour-Vraz, Fañch

Fañch

Erru om adarre ! Foeltr biskoaz !
Amañ ‘gaozeer ken deuz ar re deu en ti ?

Marhared

Eo, Fañch ; mez da zistro n’eo ket eun neventi,
Peogwir, dre hras Doue, n’out ket manet gwall-bell.

Fañch

(en eur denna e dok)

Ha goulenn a rankin diganit diskabell
Mar n’on ket evel-se bet pell a-walh e-mêz ?
Biskoaz n’am-oa gwelet tud ganet ken diêz.

Marhared

(en eur ouela)

A ! Fañch, abred a-walh on ganit glaharet !

Fañch

Dal ! Setu Madalen bremañ ‘leh Marhared !

Kaour-Vraz

Peurboent eo d’ar gêzez leñva, ‘baoe an amzer
A respontez ken rust da gomzou ken tener.

Fañch

C’hwi ‘vad, paotr koz, en-pad ‘vefoh amañ lojet,
‘Gaozeo bep sadorn ‘vid goulenn ho roched.
Dibabit a-hend-all, mar plij d’ho madelez,
Chom en peuh ‘barz an ti, pe mond da hopal ‘mêz.
Deuz ma welan re sklêr, ‘n em glevet oh ho-taou
D’ober din sarmoniou : n’on ket den d’o zelaou.
‘Vid c’hoaz oh gwall abred da rei din kenteliou,
Pa ouzon, koulz ha c’hwi, pegeid tap va gwiriou.
Peb ozah a zo mestr ‘n e di, n’ankouaet ket.
Ha bremañ nozvez vad ! rag me ‘h a da gousked.

Eil arvest

(*ugent vloaz goude*)

Kenta pennad

Marhared, Fañch

Fañch

(*stummet skuiz ha koz*)

Petra 'zo, Marhared ? Eur lizer 'zo erru ?

Marhared

(*eur lizer serret ganti 'n he dorn*)

Setu 'mañ aze, Fañch, siellet gand aour ru',
Heñvel beo ar skritur deuz hini Bastien ;
Kaer am-eus, va halon a sko, va gwad a yen,
Krena 'ra va daouarn 'raog terri ar hached,
'Vel pa ve dindannañ gwalleuriou braz koachet ;
Ne vijen ket skuisoh goude bale deg leo !...
Dal, Fañch, lenn anezañ.
(*Rei 'ra ar lizer da Fañch, hag ah a azez*).

Fañch

Digand Bastien eo.

Daoust perag 'teu hennez dre skrid d'am zaludi,
Ha me bet deh d'an noz en-pad diou eur²⁴ 'n e di ?
Gwelom !

Fañch

(*Digeri 'ra ar lizer, hag e lenn*)

« Fañch, emezañ, warhoaz 'mo an enor
Da vond bete du-ze, 'vid degas dit eñvor
An hini 'vo bepred, a zo bet hag a zo
Da vignon karanteg, Sebastien ar Prad. »
Pe 'mañ, pe n'emañ ket an devez deuz va grad,
Na c'hwi sort diganin ; mez va hontchou 'zo prest.
Nebeud a dra rankan dezañ 'vid e beurrest.

Marhared

Va Doue ! Fañch, kontchou 'baoe ugent vloaz sahet !
Ouzon-me koulskoude 'teus bet atao nahet
Dleoud netra d'hennez.

Fañch

Eun nebeud gwenneien

'Zo chomet marteze war gayer Bastien ;
Sur, ne dalvezont ket an teil a ra gante.

Marhared

Allaz n'eo ket heb souz bremazon e sponte
Va dorn ha va spered dirag eur sort lizer ;
O tostaad e kleven ar boan hag ar vizer.

²⁴ diou eur : diou eurvez.

Fañch

Na rez ket ; Bastien ‘n hini ‘zo ‘tond aze,
N’eus tamm leh da gemer spouron ‘vid an dra-ze.
(*Marhared a zao*).

Eil pennad

Fañch, Marhared, Bastien

Bastien

Demad, Fañch ! Marhared, ho saludi a ran !
C’hwi ‘zo da vihanna daou zen hag a garan,
‘Balamour ‘veh atao kaozeüz ha seder.

Marhared

Evid gwir, Bastien, om bet tud dibreder ;
Mez ne zalho ket pell on halon da dommañ,
Mar deu dem aliez.

(Hag e tiskouez ar lizer)

lizerou ‘vel hemañ

Bastien

Pez a zo war henez e ouezeh mad ho-taou.
‘N eur ober ugent vloaz e tremen kalz a draou :
En gwez e tro ar plant, en tud ar vugale,
Hag ar hontchou kuzet a zispak da vale.

Fañch

Me n’am-eus, Bastien, biskoaz kuzet netra ;
Te ‘n hini ‘glask viou en neizou ugent vloa’,
Mez ar re-ze, te ‘oar, ‘zo distrujet pell zo.

Bastien

Bez difazi, Fañchig : ganin-me ‘z eus neizo’
Ar re²⁵ na zifrezont dre hlao na dre avel ;
Re baduz int bet greet. Ankouezet az-teus, heñvel,
Az-toa ‘n o diabarz diskuizet da bluenn ?
Set’ amañ paperou ‘roio dit sklêrijenn.

Fañch

Tanfoeltr, biskoaz paper dit-te n’am-eus sinet.

Bastien

Gortoz eun tamm, ma vo da eñvor dihunet.
(En eur denna eur paper euz e hodell).
Selaou ar penn-skrid-mañ : « Me, Fañch An Olier,
Kouër em zra va-unan, o chom en Doureier,
Anzav rankoud evid absiñt, vermout, poker,
Da Vastien Ar Prad, ostiz er memez kêr,
Tri-hant tri-ugent skoed : o faea ‘rin dezañ,
‘Benn nao bloavez ahann, ‘vid termen diwezañ,
Hag adaleg hirie, bep bloaz, deuz e arhant,
‘Servijin dezañ mad a bevar skoed ar hant.
Greet ha sinet ganin ‘barz e ti Bastien.
En mil eiz kant pevar-ugent, pemp a Even. »

Fañch

(droug ennañ)

²⁵ Ar re : Pere, er skid orin.

Eur fals-skrid eo hennez !

Bastien

(en eur ziskouez ar paper da Varhared)

Sellit 'ta, Marhared :

N'anvezet ket aze e skritur ; lavaret !

Marhared

Eo, siwaz ! e skritur penn-da-benn heñvel-beo ;

Hogen, p'en-doa skrivet, e ranke beza mezo.

Bastien

Lizerennou moulet sonnoh 'vid 'n eur lever²⁶,

'Vije bet, a gav deoh, troet gand eun ever ?

Ha neuze, war ar leh, pa oa greet ar paper,

E oa Matilin gamm ha Glodig an dibrer.

Fañch

Deus atao : bezañ 'm-eus peadra da baea ;

Mez en ostaliri 'vid ar wech diweza

Am-eus bountet va zroad.

Bastien

Dit-te ne ouelin ket,

Gand ma vo em godell va oll arhant klenket ;

Rag n'hoh-eus gwelet c'hoaz dimeuz ar bakadenn

Nemed an disterra hag ar skañva lodenn.

Marhared

Petra ! billejou all a zo 'tre ho taouarn ?

Fañch

O plua yer, te 'oar, ne skuiz ket ar louarn ;

Hemañ war fals-skridou a zo ken diskuiz all,

Ha, bete laerez tud, e ra kaerra ma hall.

Gwelom petore gaou nevez a lavaro ?

Marhared

(en eur azeznn, hanter semplet)

O ! me 'garje, 'vid kalz arhant, bezañ maro !

Fañch

Na gemerez ket spont, Marhared, 'vid gevier.

Bastien

(droug ennañ)

Ha me, 'vid ma klevan gwall heriou eur mezhvier,

E-leh aon pe gounnar, n'am-eus nemed truez,

Pa 'mañ ouz va divenn onestiz va buhez.

Pep hini, a-bell zo, 'oar mad en Doureier,

N'on-me ket nag eur laer nag eur fals-skrivagner ;

Ha dirag barn ar vro ma vem lakaet on-daou,

N'eo ket me, a-daol-sur, 'vo tamallet a haou,

²⁶ lever : levr.

Rag, en-pad ma oas-te o lonka da zanve'
Me ne ren 'med gwellaad ha kreski va leve ;
'Pad ma oas o tiskenn, me 'oa o vond d'an neh,
Anvet gand ar barroz kuzulier en da leh ;
'Pad ma oas o vragal, o frika, o lipad,
Me 'oa o kemer poan hag o pinvidikaad.

Marhared
(o sevel a-daol)

C'hwi eo, m'hen lavar deoh, eun den divez ha kri',
Goude bezañ ruillet eur mignon 'kreiz ar pri,
Ober dezañ rebech war e zremm labezet ;
Rag c'hwi 'zo penkirieg da Fañch mar geo kouezet.
C'hwi eo ar higer louz a damall an dañvad
'N-eus dindan e gontell kollet buhez ha gwad,
Ar rapiner a gred rebech o faourente'.
D'ar re 'n-eus dilammet o bara digante.
Ha, mar zo bet ganeh tud diod o voti,
Abalamour d'o hov peurgarget en ho ti,
Eur Barner 'zo du-hont d'an neh, hag anvez sklêr,
Dindan ho krohenn maout, eur bleiz treitour ha laer !
Deskit diwar on houst, bremañ ni ziwallo.
Echuit 'ta buan ho labour divalo ;
Lavarit pegement 'talvezo d'on godell
Karza 'n ho kenou lor riñsador on skudell.

Bastien

Goapaad ha mallozi neb a dleer dezañ
A zo bet a-viskoaz eur hiz brao da baeañ.
Hogen, amzer da goll en ho kerz n'am-eus ket
Nag êz da chom, welloh, 'pad ugent vloaz kousket.
Re vad, bete bremañ, on bet en ho keñver,
P'am-eus fiziet keid all va arhant 'n eun ever,
Lezet ganeh ar vad en pevar skoed hepken,
Hag am-ije bet pemp leh all ; p'am-eus zoken
Prizet dond va-unan 'vid eur sort kevridi.
Mad ! warhoaz e teuio an urcher d'ho pedi
Da baea din, der nerz e baper lezenneg,
Unneg mil daou-hant lur, nemed seitteg kwenneg.

Fañch
(peurgounnaret)

Unneg mil daou-hant kwech gaouiad, laer ha trubard !
Sur on a gement-se rankan ket eur liard ;
Rag paet out-te bet ganin der ma'h even.

Bastien

Eur gwennegig bennag atao 'zigemeren ;
Mez an "apéritif" a felle d'an aotro'
Kemer diou wech bemdez, daou pe dri war an dro ;
Ar re-ze a ziskenne diwar hle²⁷ en e houeg.

Fañch

²⁷ hle : dle.

(en eur zailla gand Bastien)

Warnout e tiskenno va hraban, boued ar groug,
Ha da fals paperou 'zo bremazon en tan !

Bastien

(en eur zousa a-dreg, e tispak eur bistolenn)

Amzer, va faotr : deut eo ganin va hi bihan,
Ne harz ket aliez, mez e oar kregi stard ;
Gouzoud a reen penaoz eh out eun tammig kanfard
Buan da ziodi, ha penaoz eur lonker
Ne chom euz e zilerh taol fall ebed d'ober.
Ma vije bet arhant etre daouarn ar paotr,
An tammig engal²⁸-ze 'vije greet dichipot,
Hogen warhoaz, da heul an urcher, va zud-kêz,
E vo degaset deoh peadra ha furnez :
Rag hennez 'oar an tu da gas moneiz d'an neh²⁹.
Kenavo ! n'am-eus ken netra d'ober ganeh.
(Hag eh a mêz a-gul).

Fañch

Kee gand an diaoul, lankon, ha diwall da zistrei !

²⁸ engal : emgleo.

²⁹ da gas moneiz d'an neh : dispign kalz arhant.

Trede pennad

Marhared, Fañch

Marhared

Va Doue ! Fañch, penaoz 'hallfom-ni bikern rei
An dalvoudegez spont a houlen an den-ze ?
Ma vije bet va zad da vihanna aze !
Allaz, troet 'n-eus kein, eet war e giz d'ar gêr,
Peogwir amañ n'en-doa urz da lavared ger
Heb bezañ gwallgaset ganit en peb doare.

Fañch

N'am-eus foeltr tamm ezomm dimeuz e drugare'.

Marhared

War an noaz-krak 'vefom mar ne ro dem skoazell;
Rag n'eus den dre ar bed en eur stad ken izel
Eveldom-ni kouezet : gwerzet da beadra,
Ha sammet va hini gand ar beh pounnerra
'Oa barreg da zougen ; gweneg ebed en ti,
Skubet oll gand avel mezuz ar vezventi !

Fañch

Nag an deg skoed 'm-oa bet evid da walinier ?

Marhared

Ne oant ket eet ganit disul, paour-kêz mezhvier,
Ha, pa oas deut d'ar gêr, noz du, leun da skudell,
E chome deg kweneg bennag en da hodell ?

Fañch

Nag e vem heb arhant, danvez 'zo 'vid ober :
Ed 'leiz ar halatrez, loened 'leiz ae hrevier,
Gwrahellou foenn, kolo, lann, balan ha keuneud³⁰,
A-walh 'vid distaga deuz ar flemmer daonet.

Marhared

Neuze, ne chomo sort ganem evid beva,
Fontet on feadra e deun an toull eva ;
Hag e hallfom moned, ni hag on bugale,
Ar bisah war on choug, gand an hent da vale.
'N an' Doue, Fañch, kemer truez deuz on faotred,
O-daou leun a galon ha digor a spered :
'Vid o harz da goueza dindan treid an dud all,
Ankouaz da lorh diod, ha treh war da benn fall ;
Lez 'hanon da skriva eun tamm lizer d'am zad,
Hebdale, rag warhoaz e vo re ziwezad,
'Goude 'vo deut amañ paper glaz an urcher
Da daol warnom eur vez hag eur mizou ponner !

Fañch

Gra da hiz, Marhared : mar ne ra ket a vad,

³⁰ keuneud : keuned, er skrid orin.

Droug ne ray ket ivez kas eur lizer d'az tad.

Marhared

Bennoz Doue dit ; Fañch ! n'eo ket peurgollet c'hoaz
Ar galon garanteg 'oa ennout a-viskoaz.

Fañch

Skriv 'ta pez a gav dit 'vo muia deread ;
Ro 'nezañ da zougen d'on mab braz Benead :
Rag, 'vel m'eo bet atao kolladenn e dad-koz,
Hen kas a dalvez eun tamm brao 'vid on haoz.

Marhared

(klasket ganti pluenn, liou ha paper, en emlak da skriva).

Mad ! galv anezañ, Fañch ; lar dezañ dodn buen³¹ :

Va lizer a zo prest en pevar daol pluenn.

(Fañch ah a 'mêz, hag a zistro gand Benead).

³¹ buen : buan (evid ar rim)

Pevare pennad

Marhared, Fañch, Benead

Benead

Eun dra bennag a zo da gas d'am zadig-koz,
Va mamm ?

Marhared

Ya, va faotrig : dioustu 'h a de vezañ peurgloz
Ar lizer 'roien dit da zougen d'ar vilin.

Benead

Gwell eo ze ! gand ar stad vrasañ e hadwelin
An hini 'zo bepred bet ken mad em heñver.
Hag a zo diganem eet kuit 'baoe pell amzer !

Marhared

(serret ar lizer ganti, en eur rei 'nezañ d'ar paotr)

Dal, va faotr : kee timad war-eeun beteg e di,
Ha na lavar da zen ebed da gevridi.
Da dad-koz, marteze, 'zeuio ganit amañ.

Benead

Mar kerez avad, mamm, me 'zegaso 'nezañ :
Biken ne reuzfe tadig-koz ahanon.

Marhared

Gra 'ta 'vid ar gwella, gra herevz da galon.
(En eur ouela)
Amañ zo³², va faotrig, kalz a boan hag anken !

Benead

Mad ! dond sur 'ray ganin, evid na oueli ken,
Mammig kêz ! Kenavo emberr ! Kenavo deoh, va zad !

Marhared

Kee, va muia karet !

³² zo : tregerieg ; ez eus.

Pemped pennad

Marhared, Fañch

Marhared

En tamm bugel-ze, Fañch, 'n hini chom on esper,
En-pad ma 'mañ noz-deiz du-hont ar paour-kêz Per,
On faotr all, 'n e wele, oh ober pinijenn.
A ! Fañch, gwall druezuz eo deut on flanedenn !

Fañch

Red eo c'hoari ganti, Marhared, 'vel ma 'mañ.

Marhared

Allaz ! gwir a-walh eo 'mom diweznad bremañ
Da jala war eun droug hag a zo diremed :
An hent bet greet a-dreuz ne vo ken digammet ;
Hogen, evid furraad, sell a-dreñ e ranker,
Ha soñj az-teus pegen laouen ha pegen kaer
E tigare on hent bremañ zo ugent vloa' ?
Nemed goabrennou glaz hag heol melen ne oa ;
Ha setu, dre halloud ar lonkaj³³ milliget,
On huñvreou koanta nijet kuit en moged !
Kenta deiz ma teuas Bastien en on ti,
E oa deut war an dro gantañ ar vezventi,
An hini³⁴ 'stlapas e-mêz, taol ha taol, da vale,
Tamm bara on hozni ha tra on bugale.
Ar barti genta, Fañch, a zo ganem kollet.

Fañch

Hogen, an eil pennad marteze 'vo gallet
Hen gonid, p'am-eus bet eur gentel d'am lakaad
Da zalhen digor frank bremañ va daoulagad.
Kred 'hanon, Marhared : en amzer da zoned,
An ostizien ha me 'vefom ken mignoned.

Marhared

O è mar gallfe, Fañchig, kement-se dond da wir !

Fañch

Hen toued a ran dit, ha n'am-eus ket daou hir³⁵.

³³ lonkaj : pez a lonk oh eva.

³⁴ An hini : pehini, er skrid orin.

³⁵ hir : her (distaget e vez "gir" ar ger "ger" e meur a leh).

C'hwehved pennad

Marhared, Fañch, Benead, Kaour-Vraz

Benead

(oh antreal da genta, chomet Kaour-Vraz 'toull an nor)

'M-oa ket lavaret, mamm, e teuje tadig-koz ?
Sell anezañ aze, 'toull an nor, o hortoz.

Kaour-Vraz

(diwar an treujou)

Ya, gortoz a fell din a-raog mond tre en ti,
Ken e vin aotreet gand ar memez hini
En-doa va haset kuit.

Fañch

(en eur goueza d'an daoulin)

Pardonit d'eun ever

An diwallerez³⁶ 'n-eus bet en ho keñver,
Ha kemerit truez diouzom oll en ti-mañ.

Kaour-Vraz

(en eur antreal ha pokad d'e verh)

Anez am-oa truez, 'vijen ket deut amañ.

(Sevel a ra Fañch)

Sav, ha gwelom petra d'ober, krenn ha buan.

Marhared

(en eur vriata he mab)

Kee d'an neh, va faotr mad, war-dro da vreur bihan.

(Benead ah a kuit).

Kaour-Vraz

Pegement e houlenn ar lampon daou-benneg ?

Fañch

Unneg mil daou-hant lur, nemed seiteg kweneg.

Kaour-Vraz

Poent eo rei d'am mab-kaer ar genta medalenn :
Unneg mil daou-hant lur a draou 'n e gorzailenn !
Ha ne deu ket da zremm da ruzia gand ar vez
O soñjal en da gov 'zo eet talvoudegez
Eur plas mad, gwir ha font, lojeiz ha douar ?
Daoust ha dindan ar beh ne gren ket da ziouharr ?

Fañch

Goapait ha skañdalit ahanon gwasoh-gwaz ;
Em halon divamet eur vouez all a zav c'hoaz,
Skiltroh he rebechou 'vid oll gounnar an dud.
Muih digar on bet evid ar loened mud,
O lonka va danvez, o kemer amzer gaer,
'Pad ma oa ar re all o ouela 'barz er gêr.

³⁶ diwallerez : dizellezeg e oa bet.

Mad ! grit ouzin bremañ ‘vel ma plijo ganeh :
Dirag kastiz ebed ne gemerin an teh.

Kaour-Vraz

Marharedig, lavar kerhad Ar Prad amañ.

(Marhared ah a ‘mêz)

Set’ amañ diganit, Fañch, pezh a houlenan :
Uhellouh sav da hiz ‘vid an dalvoudegez
A zo, ‘tre seh ha glaz, war da oll diegez ;
‘Velkent hen kemerin, koll-digoll, ‘vel ma ‘mañ.
Ar menaj a oa dit a vo din-me bremañ,
Ha kement-se ‘rankez anzav dre zinadenn,
A-barz en em ouestla da baea da skodenn.

(Dispak a ra eur paper)

Deus, sin amañ dioustu, pe ne vo netra hreet.

Marhared

(o tistrei)

Erru eo Bastien, kerhet gand Benead.

Kaour-Vraz

Gouzoud ervad a reen ‘vije ket diwehad
Pa’z eo da douch arhant ‘n hini ‘m-eus hen klasket.

Seizved pennad

Kaour-Vraz, Fañch, Marhared, Bastien

Bastien
(*hep saludi*)

Va goulennet hoh-eus ?

Kaour-Vraz
(*en eur stlapa tok Bastien diwar e benn*)

Te ne zaludez ket ?

Pleg da benn, milliget, pleg anezañ izel,
Dirag homañ, gwechall itron ha dimezell,
Ha diskennet ganit e renk ar baourentez ;
Dirag hemañ, gwechall euruz 'n e garantez
Ha troet en mezh dre guzuliou fall !
Pa zoñjan en ardou 'veze lakaet gwechall,
Keit ha ma oa danvez, dond da starda e zorn,
Seblant din gweled eur hi, 'ra fae war eun askorn,
Kerkent m'eo peurgrignet gand e henou plapouz.
Te, Bastien ar Prad, eo ar gwasa lapous
A daol e droad treuzeg war hentchou ar bed-mañ.

Bastien

Selaouit 'ta, Kaour-Vraz : me n'on ket deut amañ
Da zeri va genou, 'vel eun oh minellet,
'Vid gouzoud pegen mad oh-c'hwi distagellet.
Arhant 'zo pe n'eus ket ?

Kaour-Vraz

Er gomz-se 'hanvezan

Ar helaouenn he-deus, ugent vloaz, heb ehan,
Sunet eur paour-kêz den berrwel ha diakuit :
« Mar geus arhant, me 'chom ; mar n'eus ket, me 'h a kuit ! »
Muioh a draou 'm-eus c'hoaz 'vid na 'h aio ganit ;
Ha, p'am-eus lakaet v' oll buhez d'o gonid,
Te 'hall, 'vid o flemma³⁷, mond eun tamm war da bouez.
Ha degaset az-teus ar skridou da ziskouez ?

Bastien

Ken 'vin krog en arhant, n'ay folet skrid digane³⁸.

Kaour-Vraz

Deus 'ta, c'hoari da baotr, pign war da hinkane,
Klask an urcher dioustu da verka, mar karez ;
Hogen, m'hen lavar dit : « Eun diotaj a rez ;
Rag amañ n'eus netra da Fañch an Olier,
Me va-unan a zo perhenn d'e vobilier ! »

Bastien

'N em glevet oh ho-taou da laerez ahanon ?

³⁷ flemma : c'hwiba.

³⁸ digane' : diganen.

Kaour-Vraz

Kempenn 'barz da hodell ar ger vil a laeron,
N'eo mad 'med evidout, ha dibab, tu pe du,
Diskouez da baperou, pe mond e-mêz dioustu.

Bastien

(en eur dostaad da Gaour, heb diskregi)

Sellit eta, Kaour-Vraz, mez n'o hemerit ket.

Kaour-Vraz

Da begement e sav ar pez a zo merket ?

Bastien

D'unneg mil daou-hant lur, nemed seiteg kweneg.

Kaour-Vraz

Va mab-kaer, a welan 'zo eun den skodenneg.
(Selled a ra eur pennad deuz ar paperou)
Mad ! 'vid kement paper a oa 'barz da chupenn,
Me roy dit tri-mil skoed, liard ebed ouspenn,
Ha daou vunut hepken evid ober da zoñj.

Bastien

(goude bezañ prederiet eun tamm)

Ar gontell 'lakit din, Kaou-Vraz, dindan va groñch.
Ne chomin ket da stourm ouz eun den ken penneg,
Ha gwell eo ganin koll daou-vil lur 'vid unneg.

Kaour-Vraz

(en eur rei eur yalh dezañ)

Set' aze tri-mil skoed ; degas ar paperou.

Bastien

(goude bezañ roet ar paperou da Gaour, ha digoret ar yalh da gonta).

Ya, 'mañ ar gont e-barz ; kenavo an distro !
(Hag eñ kuit)

Kaour-Vraz

Diwall ;da vounta ken da dreid plad en ti-mañ ;
Anez, da ziouskouarn 'vo lakaet da dommañ.

Eizved pennad

Kaour-Vraz, Fañch, Marhared

Kaour-Vraz

Setu eur haer a zrein dilammet euz da droad.

Fañch

Nag e teufen da skuill evidoh va oll gwad,
Ne baefen ket ar vad hoh-eus greet em heñver.

Kaour-Vraz

Evid paea da hle, dalh d'ober da zever,
Ha 'n em ro d'ar labour bemdez deuz da wella,
N'hallo ket ar pleg koz distrei d'az touella.

Fañch

Heul a ran hoh ali, en eur voned dioustu
Da gennerza va zud war-dro ar gwiniz-du³⁹ ;
Ha bemdez e talhin aketuz d'am labour,
'Vid ankouez' an evaj, va gwas a enebour.
Taolit en tan, m'ho ped, paperou an den fall,
Ma varvfont en maged, 'vel huñvreou teñval,
Ha va buhez diroll 'varvo ivez gante.
Marteze 'tistroio ar peuh, ar garante',
An eurusted gwechall, da ren 'n on tiegez.

Marhared

Doue da rei dit, Fañch, nerz ha gouiziegez,
Da weled ar pechou, ha da lammad dreiste !

Fañch

Kenavo deoh ho-taou, kenavo da greiste' !
(*Starda 'ra dorn Kaour, pokad d'e wreg, ha kuit*).

³⁹ gwiniz-du : er skrid orin "gwinis tu", pa vez distaget evel-se.

Naoved pennad

Kaour-Vraz, Marhared

Marhared

Ne gav ket deoh eo Fañch troet war an tu mad ?

Kaour-Vraz

Troet mad hen kavan, Marharedig, mar pad ;
Hogen, tan nevez-krog a vez dister e nerz :
Barreg om da gaoud c'hoaz da houzañv deuz e berz.

Marhared

O ! pedi 'ran Doue, mestr da gement tra 'zo,
Da bellaad deuz ouzon trubuill hag enkrezo'
Sort am-eus anveet en-pad ugent bloavez :
N'am-eus gwelet, siwaz ! eun deiz nag eun nozvez
Kement na ve bet test d'am daelou hirbaduz,
Daelou diou wech c'hwero, dre ma redent en kuz.
Va foaniou ne gontis da zen ebed biskoaz,
Gwell ganin va-unan ha sioul dougen va hroaz.
Gweled Fañch o toned bemdez gwasoh ever,
Bemnoz diwezatoh ha droukoh em heñver ;
Gweled on feadra skubet gand an avel,
Hag on bugaligou gouestlet 'baoe o havell
Da vond e-mesk an dud da honid bara ;
Nag en oabl koumouluz heol eved o para ;
Kement ne zegase eur rangalon neve' ;
Gand aon rag an taoliou, rankoud war va leve
Kemer arhant bepred evid galloud eva...
Eur blanedenn ken kriz a flastr ar re greñva !
Nann, den ne oar, va zad, mar n'en-deus ket douget,
Dindan pe zamm e vez gwreg ar mezhvier mouget !

Kaour-Vraz

Mar 'mije gouvezet penaoz d'engaliou⁴⁰,
Me 'm-oa da zacht 'mêz euz ar sort galeou !

Marhared

Fañch a garan, va zad, ha gwell 'oa ganin c'hoaz
Chom en ivern gantañ 'vid dilezel va gwaz.
Erru zo⁴¹ eun bennag !

Kaour-Vraz

(en eur vond war dreuz an nor da weled).

Me 'h a da weled, dal !

Fañch an hini 'zo 'tistrei d'ar gêr, eñ mezo-mik-dall !

Marhared

(en eur gregi da oula)

Va Doue, va Doue, pegoulz eta 'varvin ?

(Fañch a deu war ar leur-deatr, 'n eur vale treuz)

⁴⁰ d'engaliou : da aferiou.

⁴¹ zo : ez eus.

Degved pennad

Kaour-Vraz, Marhared, Fañch, ha goude daou archer.

Fañch

(en eur gana fall, teo ha saoz e deod).

Pa varvin, me 'gousko er hao leh ma 'mañ 'r gwin.
(Daou archer erru kercent)

Ar henta archer

Hemañ eo, a-daol-zur, an dube a glasker.
(Hag e krog en kolierou Fañch).

Kaour-Vraz

Ha diwar-benn petra 'krogit-hu em mab-kaer ?
Marteze 'balamour 'h eus paket 'nezañ mezo ?

An eil archer

(o kregi en breh all Fañch)

Kaerroh zo, va faeron : 'vid laerez 'n hini eo.

Marhared

Laer, Fañch, laer va fried ? Gaou hoh-eus lavaret,
Aotrou,pe 'vid eun all hoh-eus hen kemeret.

Ar henta archer

N'eo ket hemañ, mar plij, eo Fañch an Olier ?

Fañch

(gand eur c'hoarzin diod)

Deut eo ganeh, archer : krog oh en e golier.

An eil archer

N'eo ket c'hwi a zo bet e ti Yann an Allen ?

Fañch

(en eur gaozeal fall)

An absiñt 'oa ken gwer, ar hognak ken melen,
War vordig ar prenestr, o c'hoari deuzouzon,
Ma rankis antreal da houd petore son
E kanjent o tiskenn eonnuz e deun ar gwer.
Setu-me tre en ti : ne oa foeltr den er gêr,
Mez war an daol e oa, digor frank ha dispak,
Eur goz yalh, bet ankouet eno gand eun bennag.
Gand an ostiz, moarvad ;ha, peogwir e oan paour,
Gwenneg ebed ganin, pevar dammig pez aour
'Gemeris deuz ar bern... Set aze eun taol kaer !
Eur farserez 'oa ken : me, nan on ket⁴²... eur laer.

Marhared

Rentet az-teus, 'velkent, ar peziou d'an ostiz ?

Fañch

⁴² nan on ket : tregerieg : n'on ket.

‘Oa den war-dro.

Kenta archer

Renti refoh ‘ne d’ar Justis.

Fañch

Setu amañ dioustu an tri bez ‘zo ganen :

(Rei a ra tri bez ugent lur)

Egile ‘m-eus friket da gemer eur banne :
Sehed a oa, va faotr. Va zad-kaer ‘zo aze,
Hennez ‘zo pinvidig, a baeo an dra-ze.

Kaour-Vraz

Tremenet eo, siwaz ! an divalo gantañ,
Hag amañ dre ar vez e rankfom oll fontañ.
Paea ‘rin koulskoude, kentoh ‘vid hen gweled
O voned gand ar ru, ‘vel eur marh hualet.

Eil archer

Paea ne zervij ket : skoet e rank bezañ
Gand skourjez ar Lezenn neb a deu da gouezañ.
Prest om ! Baleom ‘ta buan, Fañch Olier ;
Tost e kouski fenez da wreg ar Brigadier⁴³.

Fañch

(en eur starda e benn etre e zaouarn)

Pebez den on eta ? Mezo e oan adarre.

Kenta archer

(en eur zacha war Fañch)

Bremañ ‘vid moredi ‘klaskez eun digare’.

Marhared

(gand eur griadenn, ‘n o koueza war an teatr)

Fañch !

Kaour-Vraz

(en eur zevel anezi war eur gador)

Prizit, aotrounez, eru pennadig gedal.

Marhared

(o kaozeal gorreg)

Eur munudig, mar plij, evid mond d’ar bed all !

Fañch

*(distrei a ra da gichenn e wreg, an archerien eun tamm
pellh.*

Poan az-teus, Marhared ! O ! den fall ‘zo ‘hanon !

Marhared

Eun dra bennag, ‘gav din, ‘zo torret em halon.
Hag eh an kuit...

⁴³ da wreg ar Brigadier : er prizon.

Fañch

(*en eur zaoulina 'n he hichenn*)

Pardon, pardon, Marharedig !

Marhared

Kuit ahann, Fañch, digand ar vuhez reuzeudig
'Teus greet din penn-da-benn ; tostaad 'ra an diwez
Dimeuz an ankeniou, an daelou, hag ar vez !

(Hag e lavar d'he zad)

Va zad, kerhit dioustu va mabig Benead :

'Benn eur pennad, siwaz ! 'vefe re ziwezad.

(Kaour ah a er-mêz).

Yaouank, koant ha laouen, az-toa va hemeret ;

Trist, kozet ha distruj, em rentez da vervel.

(Kregi a ra en dorn Fañch)

Mez pardoni 'ran dit va buhez, va maro,

Bleuniou va yaouankiz gweñvet 'kreiz an daero' !

Gwechall, am-eus klevet, e deun koajou teñval,

Eneou gwerh ha glan 'varve da derri gwall⁴⁴ ;

'Vid lakaad, mar geller, poan va zud da dremen,

Me 'n hini varv hirie, ledet war an daolvên.

Ra vo, Fañch, va maro evidout eur gentel,

Ha da welloh buhez ra deufes da henel !

(Pokad a ra dezañ. Benead a zeu gand e dad-koz, hag a grog e dorn e vamm).

Tosta din, va hêzig : a-raog da zilezañ,

D'ar vamm az-teus karet ro da bok diwezañ.

(Pokad 'ra dezañ diou wech).

Eun evidout, eun all evid da vreurig kêz,

Stag war e damm gwele, heb galloud dond e-mêz ;

Hogen eñ a zeuio hebdale d'am gweled.

D'an neh du-hont, er vro leh na vo ket gouelet.

Bez sentuz, va faotrig, na varnez ket da dad ;

Ped evid da vamm baour, chom fur, onest ha mad.

(Miroud a ra dorn ar paotr, ha gand he dorn all e krog en hini he zad).

Ha c'hwi, va zad karet, skwer vad an oll dadou,

O vervel, e soñjan 'barz an huanadou

Hoh-eus greet warnon-me, gwechall, pa oan bihan,

Nebet diwar va fenn, noz ha deiz, heb ehan :

Ar memez beh a gouez war ho chouk adarre ;

Mez du-ze 'vefom diou o veill war ho korre,

Hag eun devez bennag eno ni 'n em gavo

Unanet da viken.

('Trezeg he gwaz :)

Kenavo !

('Trezeg he mab)

Kenavo !

('Trezeg he zad)

Kenavo er bed all ! Ra blijjo... gand Doue...

Reidin-me... e bardon... ha deoh oll... hir vuhe' !

(Plega 'ra he fenn war he bruched, maro. Benead a bok dezi c'hoaz, hag he zad goude).

⁴⁴ da derri gwall : evid lakaad an amzer da zond da blega.

Kaour-Vraz

Fin 'zo : eun tal skornet, daou lagad serret kloz !

*(Benead a ziroll da ouela, ha Kaour a lavar en eur vounta
kuit Fañch, a glask ivez pokad d'e wreg).*

D'ar prizon, den digar, ha warnout vaq malloz !

(An daou archer a gas Fañch gante).

Trede arvest

Kenta pennad

Mon-goz

(o komz ganti heh-unan)

A-drugarez an diaoul, Mon-Goz 'zo beo bepred !
Dindan va hrohenn seh ne blij netra, me 'gred,
D'an ankou ezommeg ; preñved an archedou.
Ne lardfent ganin-me nemed a-nebeudou.
Greet o-doa tri miz 'zo laouennoh degemer
Da Varharedig koant, gand flour ha kig⁴⁵ tener ;
Hogen hirie, m'hen tou, loened louz ar vered
Gand he mab yaouankañ 'h a da vezañ laeret :
(Neuze 'kleve o kana e-mêz war don ar Psalmou)
« Requiem æternam dona eis, Domine,
Et lux perpetua luceat eis. »
(Mon-Goz a deu war doull an nor, hag a gendalh).
Setu e damm laouer o vond du-ze en-dro,
Douget, 'vel boest vihan eur bugelig maro,
Dindan gazell eur gwaz ; nan foeltr biskoaz n'am-oa
Gwel't ober kemend-all 'vid eur paotr pemzeg vloa' !
Ne oa ket, a gonter, eun dornad anezañ,
Ken kastiet ma oa e gleñved diwezañ ;
Hag ar medisin koz, heñvel, a lavare,
Pa gavas anezañ maro deh ar beure :
« Diwar eun tad devet pell 'zo gand an eva
'Oa ganet eur bugel re ziwad da veva ;
Hag eur maro muioh war gont ar gwin-ardant ! »
O ! me 'garje gweled pevar-ugent war gant
Dre halloud an evaj rastellet deuz ar bed,
Ken liez ma soñjan 'n eun amzer am-oa bet !
Triweh vloaz, sonn va fenn, "Monig Vrao" va ano,
Arhant 'leiz va godell, spered 'leiz va geno',
Eur gwaz din sort na oa hini bet dre ar vro,
Yaouank ha pinvidig, seder ha paotr faro ;
Eurvad ha karantez, beteg ar gwall devez
E teuas va fried d'ar gêr war eur hravez⁴⁶,
Douget gand pevar gwaz, yenet da virviken,
Pa ne oan ket maro neuze, ne varvin ken :
Pemzeg deiz 'oan bet klañv, ugent vloaz 'oan bet foll,
Eet va fenn, va hened, va feadra da goll ;
Ha d'an oll gwalleuriou ne oa netra kirieg
'Med hini-kreñv lonket war eur baraiadeg !
Abaoe hanter-kant vloaz paourez, kromm, divalo,
N'am-eus ken 'med eur c'hoant em hoz kalon houllou :
C'hoant gweled kement 'zo euruz war an douar
Dre ar memez evaj tanfoeltret er glahar !...
Bremañ 'ven gand Paolig lakaet 'n e zekrejou,
Haqg e welan d'an noz, a-dreuz va huñvreou,
Kement maro 'dle dond a-berz ar Vezventi.

⁴⁵ : kig : krohenn Marhared.

⁴⁶ eur hravez : eur hravaz

Amañ, da vihanna, 'kouez va zroad en eun ti
'Leh am-eus pijadur o weled skuill dareo' ;
Ha daou all, a-dra-zur, 'vo dindan eur miz⁴⁷ all.
Rag, en-pad diou nozvez, 'm-esus klevet oh harzal
Chas ar "Gêr Aveleg" dindan sklêrder ar loar,
Ha, war daol hanternoz, gwelet ar goulou koar
O krena d'an avel e toull dor an ti-mañ.

⁴⁷ miz : mizvez.

Eil pennad

Mon-Goz, Fañch (peurvezo)

*(Adaleg bremañ beteg an diwez, Fañch ne gomz ken 'med
'n eur druilla e gaojou).*

Fañch

Mon-Goz, ar zorserez !... Petra 'rez-te amañ ?

Mon-Goz

Ar pezh na zell foeltr tamm ouz Fañch an Olier,
Pa 'n-eus netra dezañ, na ti na mobilier,
Netra, nemed e gov da lonka hini-kreñv.
Petra ! Sachet az-teus ganit da benn-a-dreñv⁴⁸
E-leh mond d'ar vered da zouari da vab ?
Mad ! Fañch, me 'ra ganit eun den ouz an dibab,
Ar sort na vale ket nemeur dre an hentchou !

Fañch

Me 'ra forz, a gav dit, deuz interamañchou ?
Kred ahanon, Mon-Goz : nehet ne chomin ket
Etre ar gwin-ardant hag an dour benniget,
Etre pezh a gennerz ha pezh a skorn ar gwad.
Tra vin barreg da ren va-unan va daou droad,
N'eo ket hent ar vered a gemerin gante.
Mez penaoz e houzo, an traou a zeblante
Bezañ din en ti-mañ, na 'maint ket em ano ?

Mon-Goz

Ar gaoz-se, diod kêz, 'zo stank en peb geno' ;
C'hoarzet am-eus va gwalh o kleved lavared
E talher ahanout, 'vel eur hi kounnaret,
Diwar-bouez ar chadenn, ha 'velkent, dichipot,
Bemdez 'teuez a-benn da leunia da ribot
A-raog ma ve kuzet an heol 'dreg ar mene',
Kement-se 'zo fentuz, dampred e vo m'ene !

Fañch

Etre Kaour-Vraz ha me na vountez ket da fri ;
Rag ker e koustfe dit eun heveleb c'hoari.

Mon-Goz

Dihourdrouz din, penn mezo, ha kemer da oll droug
Deuz an neb a zalh stard ar gordenn war da houg.
'Teus ket a vez, eur paotr a spered evelout,
Plada, 'vel ki bihan desket d'ober "chibout",
Dirag eun den foeltr perz dezañ war da horre ?
N'anvezez ket eun tamm da wiriou, 'vid doare.
Me, na foeltr deskamant din na gwenneg leve,
A oar ervad 'velkent, dre ar lezenn neve'
'Teu dit ar bederved euz leve da bried ;
Setu da vab yaouank d'ar bed all partiet,
Eur bederved dit c'hoaz dimeuz e oll danve' ;

⁴⁸ Sachet az-teus ganit da benn-a-dreñv : mond war-gil.

Egile, p'eo minor, te 'dle touch e leve :
A-bez 'mañ tra da wreg etre da grabanou.

Fañch

Gweled a ran n'eo ket euz ar brava genou,
Mon-Goz, e teu dalhmad an aliou gwella :
An Diaoul 'n hini 'zegas 'hanout d'am zouella.

Mon-Goz

Mad ! selaou an Ivern kentoh 'vid an Neñvo'
Hag eun dro bennag c'hoaz te 'lonko, te 'vevo,
Hini-kreñv o ruillal dre greiz da vouzellou,
Arhant Kaour-Vraz o son e deun da hodellou !

Fañch

O ! sorserez daonet ! te 'ra din huñvreal
'M-eus kavet eru vengleuz peziou ugent real,
H ag e red dirazon mammennou gwin-ardant !
Nag a blijaduriou 'ven barreg da dañvaad !

Mon-Goz

Ne fell dit nemed nerz da gas an taol da vad ;
Mar geus eun tamm bruched dindan da chiletenn,
Kaour-Vraz a zigoro presteig e diretenn.
Mez hen kleved a ran o toned gand ar ru,
Hag e vank din kuitaad a-raog ma vo erru :
Stumm ar sort amprevan a zisplij din a-grenn,
Kenavo, Fañch ; gwel't e vo mar 'teus kalon ha penn.
(*Hag eh a kuit*).

Trede pennad

Fañch, e-unan

(En eur hornig kuzet e kemer eur voutailad leun, hag a lavar) :

O ! va boutailad kêz, kuzet pell euz an de',
Pell euz an daoulagad, te eo va hanrante »,
Deus, ma roin dit c'hoaz, eur pok, 'barz ma teuio
Ar paotr-koz war e giz !

(Ober a ra eur zach war ar voutailad).

N'anave ket va zroio ;

Anez, te 'oa pell 'zo torret oe dihouget...

Eur zachadennig c'hoaz !

(Eva 'ra adarer).

Ha bremañ 'vi douget

D'ober da dammig kousk aze, va boutailadig !

(Hag e vount anezi war he hiz er horn kuzet).

Emberr me... zistroio... da wel'd.... an armelig....

(Koueza 'ra war eur gador, mezo-tre, hag en em daol da gousked).

Pevare pennad

Fañch (*kousket*), Kaour-Vraz.

Kaour-Vraz
(*gand droug*)

Setu ar penmoh-mañ leun e gorv adarre !
Kerkent ha ma klevis war besort digare'
E oa 'n em zachtet kuit e-kreiz mond d'ar vered,
Am-oa soñjet dioustu ne oa ken 'n em laeret
'Med 'vid mond a-gostez da zuna bannahou.
Sort-se 'dlefe bezañ lardet a vahadou ;
Rag muioh digalon int e-keñver o zud
'Vid n'eo d'o re vihan ar gwasa loened mud !
(*Hija 'ra 'nezañ*)
Fañch ! Fañch !

Fañch
(*poan dezañ o kaozeal*)

Eun.... huñvre kaer... Piou an diaoul 'zo
aze ?

Kaour-Vraz

Eet eo da vab yaouank en douar.

Fañch

An dra-ze

Ne zell tamm ouozn-me : an touller 'zo paeet
'Vid douari an dud ha boueta ar preñved.

Kaour-Vraz

Deut out, dre forz eva, gwall griz ha gwall haro
'Benn komz ken dizeblant war da vabig maro.
Egile, Benead, a zo bremañ, me 'gred,
O kleved e zetañs gand ar marhadour ed :
Laret 'oa dezañ mond, goude 'n interamant,
Da ziskouez d'an aotrou e dammig deskamant.

Fañch

Hennez ervad, mar kar, savet evel ma 'mañ,
A glasko tu pe du d'en em zibab bremañ.
(*Skei a reer war an nor*)

Kaour-Vraz

Digorit !

Pemped pennad

Kaour-Vraz, Fañch, An Aotrou Roparz, Benead
(*Fañch a chom azezet*)

An Aotrou Roparz

Demad deoh ho-taou.

Kaour-Vraz

Ha deoh, aotrou.

Kemerit eur gador.

(*Azeza 'reont o zri*)

Penaoz eo bet an dro ?

Marteze 'gavit ket ar paotrig deuz ho kiz ?

An Aotrou Roparz

Plijoud 'n hini 'ra din kenañ e yaouankiz,
E zremm, e zeskamant, e skritur, e spered ;
Mez, a-raog 'vo du-mañ 'vid mad degemeret,
E fell din kleved c'hoaz eun nebeud doareou
Diwar-benn onestiz e dud.

Fañch

Digareziou !

Kemer a rit ar paotr, aotrou, pe ne rit ket ?

An Aotrou Roparz

Urz am-eus da houzoud gand piou 'n-eus eñ desket
Bezañ fur ha gwirion : n'eo ket er levriou
'N hini 'kaver merket hent an oll deveriou ;
Ar lodenn vraz a chom da zeski dre skwer-vad,
Dre gentel ar gerent, dreist-oll dre vouez ar gwad.
'Benn fizioud va hontchou va yalh, va feadra,
'Tre daouarn dianvez eur paotrig triweh vloa',
Me 'rank goud pere⁴⁹ 'n-eus en e galon hadet
Greunenn an onestiz, ar gwir, ar lealded.

(*Da Fañch*)

C'hwi eo tad dezañ ?

Fañch

Ya.

An Aotrou Roparz

Penaoz 'mañ hoh ano ?

Fañch

Fañch an Olier.

An Aotrou Roparz

Sell ! 'narz em hazetenno'

Nevez zo 'm-eus gwelet eun ano 'vel hennez,
Paket tri miz⁵⁰ disheol gantañ war-benn laerez.

⁴⁹ pere : gand peseurt tud.

⁵⁰ miz : mizvez

N'eo ket c'hwi 'oa, 'michañs ?

Fañch

Eo, sur : en eur c'hoari

'Kemeris pevar bez 'barz eun ostaliri ;
War an digarez-se 'oan tremenet 'vid laer,
Mez bet am-oa, 'velkent, ar lezenn Bérenger.

An Aotrou Roparz

Mad ! keun 'm-eus eo ganeh 'n hini 'zo degouezet
Eun taol ken divalo : rag setu labezet,
Goude 'mañ didamall, ho mab da virviken.
Hen kemeret 'mije ; bremañ 'vad, ne rin ket.

Kaour-Vraz

Me 'zo tad-koz, aotrou, d'an tamm paotr yaouank-mañ,
Hag a zo prest dioustu da warant evitañ
Ugent, tregont mil lur, daou-ugent, mar bez red.

An Aotrou Roparz

Pesort eo kement-se 'vid eur marhadour ed ?
Ha neuze, pa zoñjan, eur si 'dle bezañ c'hoaz,
'N hini⁵¹ vez peurvuaia tad d'ar re all, siwaz !
N'oufen krenn diskredi ar pezh am-eus klevet,
Peogwir, hirie zoken, Fañch a zo 'n em vezvet.

Fañch

(o sevel a-daol, hag o klask en aner 'n em zalhen sonn).

Me 'zo mezo ? Me..., aotrou, me... n'on ket mezo, c'hwi 'oar.
(Hag eh hadkouez war e gador).

An Aotrou Roparz

Lakom, mar kavit gwell, oh fall war ho tiouharr.
Poan ra ganin 'vidout, va faotr, 'vidoh, tad-koz ;
Hogen, da gement-mañ hini 'hanoh n'eo kaoz.
Ar mab a zoug ar beh euz dizurziou e dad,
Ha me 'chom en disfi dirag lezenn ar gwad.
(Sevel a ra. Kaour-Braz ha Benead a a ivez)
Kenavo, va zud kêz : pa skofoh war va dor
Evid eur servij all, beperd e vo digor/

Kaour-Vraz

Kenavo deoh, aotrou, ni n'ho tamallom ket ;
Evid ho komzou mad bezit trugarekaet.
(An aotrou Roparz ah a kuit).

⁵¹ 'N hini : P'hini, er skrid orin.

C'hwehved pennad

Fañch, Kaour-Vraz, Benead

Fañch

(azezet atao).

Kleo 'ta, didalvez braz, genaoueg, laer-bara,
Te chomo war va horv atao d'ober netra ?

Benead

Med ne houlenan ken, va zad, nemed labour,
Ha, mar 'mije kavet e ti ar marhadour....

Fañch

(Gand krizder)

Ya da ! lavar bremañ, evel an diod all,
Me 'n hini 'zo kirieg dit ma rankez gedal,
Me 'n hini 'zo a-dreuz war da hent da vale,
Me 'n hini 'zo kabluz, p'eo fall va bugale :
Egile 'zo maro, dizeh e wazied,
Lavaret 'oa kerkent me 'n hini 'oa siet ;
Hemañ ne ray biken sort gand e vizied,
Lavaret 'vo atao me 'n hini 'zo siet !
Mad ! skuiz on, evel kent, o kleved rebechou,
Hag o weled peb droug tamallet d'am zechou ;
Va gwiriou dilezet ententan kaoud bremañ,
Ha bezañ, 'vel gwechall, mestr hepken en ti-mañ.

Kaour-Vraz

Ankouezet eo ganit, Fañch, 'm-eus-me sidanenno',
Da lavared n'eus sort aamñ war da ano ?

Fañch

Eun tamm amzer, paotr koz ; ni 'welo bremazon
Gand p'hini 'mañ ar gaou, gand p'hini ar rêzon.
Alese, Benead, ha skoulm da bakadenn ;
Warhoaz 'kasi da dreid d'ober eun dommadenn.

Kaour-Vraz

(en eur bokad dezañ)

Kee sioul, va faotrig kêz ; bez dineh ha dizoan ;
Tra vo beo da dad koz, ne houzañvi nep poan.
(Benead ah a kuit 'n eur ouela).

Seizved pennad

Fañch, Kaour-Vraz

Kaour-Vraz

Mez am-eus evidout, den kriz, tad dinatur,
Gwel'd penaoz e rannez kalon da grouadur ;
Hogen, me warant dit, tra vo ennon buhez,
Em halon-me 'kavo karantez ha truez,
Ha skabell 'vid ar paotr a vo bepred amañ
Deuz an daol da zebri, 'tal an tan da dommañ.

Fañch

C'hwi 'zoñj atao, laer koz, bezañ mestr d'am danvez,
Mez bremañ e kanfoh eur ganaouenn nevez :
Re bell hoh-eus dalhet 'hanon dindan ho klin ;
M'ho kaso hebdale war ho kiz d'ar vilin,
Da ren war ar logod hag ar gleskered-dour.

Kaour-Vraz

Pell 'zo, Fañch, dre zindan eh out din enebour ;
'Velkent, n'az-toa biskoaz kredet, bete bremañ,
Dispak en dizolo da vroud evid flemmañ.
Mad ! stourmom pe giri : gwelom petore gwir
Az-teus 'bazz an ti-mañ da lavared eur gir⁵² ?

Fañch

Rentet din kont eta deuz leve va fried,
A zo ganin da douch 'baoe 'mom dispartiet.

Kaour-Vraz

Ar gont 'zo berr : paeet zo din pevar-hant skoed,
Am-eus, en ano 'r paotr, lakaet da honid boued ;
Ha seiz mil lur e hle, echu 'n amzer oute,
'M-eus-me, deuz va godell, paeet evidout-te,
P'hini 'hanom on-daou zo dleour d'egile ?

Fañch

(en eur gregi 'n e benn-baz)

'Vel-se 'n hini 'kasit hahanon da vale,
'Leh restaol din ar pezh a rankit, lampon koz ?
C'hwi 'zoñj deoh n'am-eus ket intentet mad ho kaoz
O kinnig daou-ugent mil lur d'ar marhadour ?
'Pad ma ven o poaniañ, o yun, oh eva dour,
O pellaad deuz ouzon an oll blijaduriou,
C'hwi gand ar pezh 'zo din a gresk ho teñzoriou,
Hag a hoarz goap din c'hoaz abalamour on paour ?
Skuiz on pelloh, Kaour-Vraz : va lod arhant hag aour
A rofoh din dioustu, pe, dampred 'vo m'ene !
Va fenn-baz war ho chouk 'h a d'ober dañs Kerne.

Kaour-Vraz

Daoust ha te grefe skei gand eun den deuz va oad ?

⁵² eur gir : eur ger.

Evid laerez arhant daoust ha te skuillfe gwad ?

Fañch

Arhant amañ, Kaour-Vraz, pe 'h a va baz en-dro ?

Kaour-Vraz

Liard ebed, laer fall : n'emañ ket c'hoaz er vro
Ar hiz da skei an dud 'vid kaoud o gwenneien.
Soñj az-teus 'oa bet krog ennout an archerien ?

Fañch

(en eur skei anezañ war e benn)

Dal 'ta, loen aheurtet !

(Kaour-Vraz a gouez war e hed, ha Fañch a sko c'hoaz daou pe dri daol).

Kaour-Vraz

(en eur goueza)

O ! faoutet eo va fenn,

Ha den ebed war-dro, siwaz din ! d'am divenn ?

Mervel a ran... Doue, diwallit va mabig⁵³ !

(Mervel a ra).

Fañch

(Taolet e benna-baz, e taoulin 'kichenn Kaour, hag e lak eun dorn war boull e galon).

Me 'gav din 'm-eus lahet anezañ maro-mik.

Gwaz dezañ ! Ma karje bezañ sentet ouzn,

En-dije gallet c'hoaz beva, komz ha c'hoarzin,

'Vel ma rin-me prestig.

(En eur furchal godellou Kaour).

O ? pebez c'hoari gaer !

Bannah ebed ne vo na re vad na re ger

'Vid genou Fañch, pa vo krog e moneiz Kaour-Vraz.

Poent e oa din : pell 'zo 'oan 'n em gavet paour-raz,

Sell ! peleh 'mañ ar yalh ? A ! setu-hi amañ !

Gwelom 'ta pegement arhant a oa gantañ.

(Digoret ar yalh, e tenn eur pezh eiz real da lakaad en e hodell, hag e stlap ar yalh pell deuz outañ, en eur hopal) :

Netra ! netra, nemed eur hoz pezh eiz real !

A ! fripon, penn-da-benn e laerez ar re all,

Koulz war-lerh da varo 'vel en-pad da vuhez ?

Kement-se baefet din.

(Hadkrog er vaz, e hij 'uz da benn an hini maro, mez he lezel da goueza, o weled e vab oh arrououd).

⁵³ va mabig : va mabig-bihan (Benead).

Eizved pennad

Fañch, Benead, hag ar horv maro

Benead

Petra 'zo, va Doue ?

Pebez taolenn spontuz dirag va daoulagad !
Tadig-koz d'an douar, beuzet 'n eur poullad gwad,
Dizell ha dilavar 'vel pa vije maro,
Ha va zad en e zao, ruz-gwad e vaz-dero !
(Daoulinet e-tal e dad-koz, e halv, en eur bokad dezañ).
Selaouit, tadig-koz, komzit euz ho pugel ;
N'it ket, 'vel va mamm baour ha Per, d'am dilezel :
Penaoz e rafen-me va-unan dre ar bed ?
Tadig-koz, dihunit, tadig-koz !... Van ebed !
(Kregi 'ra en e zaouarn).
Skornet eo ezaou zorn ;
(Lakaad a ra an dorn war e galon).

E galon ne sko ken !

(En eur ouela).

Maro 'vel an daou all ! O ! gwasa beh anken
Hoh-eus roet din-me da zougen, va Doue !
(En eur zevel a-daol dirag e dad).
Mad ! Echuit, va zad, ho labour didrue' !
Maro va mamm, va breur, ha c'hwi 'oa de⁵⁴ penn-kaoz,
Lahet a-daoliou baz ganeh va zadig-koz,
Ne chom beo deuz ho tud nemedon-me hepken ;
Ha c'hoaz 'mañ va enor kollet da virviken,
Prennet ouzin an nor deuz an oll dier mad,
Ruz va zal gand ar vez, ruz va hent gand ar gwad ;
Echuit en eun taol labour ho lonkerez,
Lahit 'hanon d'am zro gand baz ar munterrez !

Fañch

Greet az-tije, va faotr, eur maout a brezeger :
Ranket am-eus selaou heb lavared ger,
Ken flour ma red ar gomz diwar da vuzellou ;
Mez, allaz ! gwelloh eo da deod 'vid da zellou.
Kouezet eo da dad-koz e-unan, bet risket,
Hag e wad 'n hini 'zo war va fenn-baz strinket.

Benead

O ! 'vid kalz a zanvez 'karjen bezañ gaouiad !
Mez, pa welan gwad ruz bete war ho tillad,
Yalh va zad-koz stlapet goullo war blad an ti,
Eh anavezan re zur dorn louz ar Vezventi,
Hag e lavaran deoh, gand rêzoniou re sklêr ;`
« C'hwi 'zo muntre, va zad, c'hwi 'zo muntre ha laer ! »

Fañch

Kee 'ta, mab digalon, kee gand mall ha gand stad
Da gerhad archerien dond da gregi 'n ez tad.

⁵⁴ de : deze.

Benead

Nann ! rag komz diweza va mamm a zo manet
Em fenn hag em halon 'vid eur wech garanet :
« Na varnez ket da dad ! » he-doa kemennet din ;
Ha, kousto pe gousto, d'he lavar e sentin.
Mez, gand aon e rankfen anzav ar wirionez,
Pa deuiio barnerien ha bep sort aotrounez
D'ober amañ hadklask diwar-benn ar maro,
Me 'deho kuit a-raog va flanedenn haro,
Kuit 'raog an dismegañs a bouez warnon bremañ,
Kuit 'rag ar hlizenn-wad a gouez war an ti-mañ.
Ken pell eh in, ken pell, ne vo ken anavezet
E tougan eun ano gand va zad labezet.

Fañch

Kee prim, chaler⁵⁵ daonet, ha diwall 'rag va zroad !

Benead

(en eur bokad c'hoaz d'e dad-koz)

Kenavo, tadig-koz ; ar paour kêz divroad ;
'N eur guitaad da viken douar sakr Breiz-Izel,
Ho ped, euz lein an Neñv, da daol warnañ eur zell.
(En eur vond kuit, heb distrei)
Na glevfoh ken, va zad, kaoz ebed dezu ouzon.
(Ha kuit).

Fañch

Gwell eo se ! ra varvi 'tre daouarn ar Zaozon !

⁵⁵ chaler : klemmicher.

Naoved pennad

Fañch

(e-unan gand ar horv maro).

Eun taol fall-klañv 'm-eus greet o laha va zad-kaer !
Ar wirionez 'lammfe gand lagad peb archer...
Koulskoude, ma rajen eun tamm ingal d'an traou,
E teufe marteze da vezañ gwir va gaou.
Gwelom : lakom ar yalh da gentañ leh ma oa.
(Hag e lak ar yalh e godell Kaour. Chom a ra da brederia eur pennad, hag e hop a-daol, 'n eur skei war e dal).

A ! va zilvidigez a zo greet !... Pebez joa !
An diaoul Benead, o tehel 'vel eur laer,
A ro din ar brava digarez ma haller
C'haontaad evid dizamm ar beh war gein eun all !
Me 'zo gwennoh evdi ar bugel o henal⁵⁶,
Ha Benead, pa oa da vezañ heritour,
'N hini eo ar laher, ar laer, an torfetoor !
Din-me 'vo da zanvez 'vid lonka bannaho'
Kaour-Vraz, ha da graban morse ken na zalho
Deuz ouzon da gregi en da verniou arhant !
(En eur gemer e voutailad kuzet, hag o sevel anezi d'an neh ;)

Dispak 'hellez bremañ, boutailadig gwin-ardant,
Kuzet keid-all amzer evel eur leanez ;
Bremañ te 'vo bepred mestrez ha rouanez,
Karantez va halon, ha sklêrijenn va zi.
Deus eta da freskad va goug, da frealzi
Kement gwazienn veo a red dre va horv paour ;
(Hag e ra eur zachadenn hir).
Tommoh out 'vid an tan, ha splannoh 'vid an aour !
(Taol a ra e zaoulagad war an hini maro)
Selled 'ra deuz ouzon ar paotr koz milliget :
Gortoz, me 'h a d'az trei war an tu 'weli ket !
(Trei a ra Kaour e zremm euz an douar, hag eh ev eur bannah all).

Yehed mad dit, Kaour-Vraz !
(Gand eur stumm spouronet).
Bremañ 'z eus eur lagad,
Troet 'trezeg amañ, spontuz, e-kreiz ar gwad !
Mar kredfen, m'hen pladehe gand seul va boutou-ler ;
Hogen ne gredan ket, gweled a ra re sklêr...
Bremañ zo⁵⁷ daou... pevar... c'hweh lagad war eun dro,
O selled diouzin, kounnaret, heb ehan,
Ha peb re deuz oute zoken eh anavezan :
Re hlaz Perig, re hlaz va gwreg, re du Kaour-Vraz...
Aon am-eus, aon am-eus !... Evom eur bannah hoaz.
(Eur zachadenn hir a ra adarre, Skarzet ar voutail gantañ war-bouez nebeud, e stlap anezi war an teatr ken a dorr en mil tamm).

Keen loustoni ar foeltr ! devi 'rez va eskern
Evel eun houarn ruz, pe 'vel tan an ivern !
Setu 'mant en-dro din, Per, Kaour ha Marhared,

⁵⁶ o henal : o henel.

⁵⁷ zo : ez eus

Gante peb a voutaill leun a win alaouret,
Hag e lavaront din : « Ev ‘ta, ev ‘ta ! ev ‘ta ! »

(En eur hadkemer e benn-baz).

Gortozit, goaperien, me ‘h a d’ho pahata⁵⁸ !

(Hag e sko tro-dro gand an avel, ken a gouez e zivreh gantañ, skuiz).

N’ on ken evid larda, hag emant aze c’hoaz,

O tostaad din bepred, ‘n eur hoarzin gwasoh gwaz ;

En o hichenn diaoulou, gand ferhier hir ha lemm,

Hag eur pez êrouant, skilfeg, ruz-tan e flemm !

(Koueza ‘ra d’an daoulin, en eur starda e houg gand e zaou zorn).

A ! A ! A ! gand va goug e lamm an êrouant ?

Eur bannah, eur bannah, eur bannah gwin-ardant !...

(Mon-Goz, antreet sioul, a chom ‘n he sav, digomz, e deun ar leur-deatr).

⁵⁸ d’ho pahata : ho pazata.

Degved pennad

Fañch ; Mon-Goz, Ar horv maro

Fañch

(atao daoulinet, o selled deuz Mon-Goz).

Erru eo d'am herhad êl teñval an Ankou :
Setu dindan va zreid digor an Islonkou,
Ivern an everien hag an dorfetourien !
(En eur starda e houg a-nevez).
O ! piou a rofe din eur bannahig dour yen
Da vouga an tangwall 'zo krog em diabarz ?
Bannah ebed, bannah ebed !...n'on ket 'vid harz...
Fin 'zo... Ar maro 'deu gand e deñvalijenn...
Mervel, mervel daonet !... Malloz d'an ostizien !!!
(Ruillal a ra d'an douar, maro).

Mon-Goz

*(Dond a ra tre da gichenn Fañch, ha, goude bezañ bountet
anezañ gand he zroad, e lavar) :*

Gand ar mezhvier louz-mañ 'zo bet eun diaoul a boan :
Tremenet eo 'velkent ; deut int o-daou d'o hoan !
Lavaret mad am-oa 'vije bet daou varo !
Greet 'n-esu ar Vezventi eur labour ken faro,
Ma rankan war an taol, gand va hoz mouez kaouenn,
Distaga 'n he enor eun tammig kanaouenn :

Son ar vezventi

*(war don : Eun alarh, eun alarh tramor, 'vel 'mañ er
Barzaz Breiz).*

Amzer 'oa bet hag e rene
En Breiz duked pe rouane' ;
Bremañ n'anavezzer ken ane⁵⁹,
Hag eur roue 'zo koulskoude
Ge !
E halloud o kreski bemde' !

Amzer 'oa bet hag e vije
Eur wech bep bloaz ar Meurlaje' ;
Bremañ 'reer anezañ bemde',
Tra ma pad an tammig danve'
Ge !
Tra ma chom gwerzig eur banne.

Amzer 'oa Breiziz a lare
Ne drehehe sort war o gorre ;
Bremañ, dinerz evel eur preñv,
Diskaret gand an hini kreñv,
Ge !
'Kouez paotr Breiz war e benn-a-dreñv.

⁵⁹ ane : aneze.

Amzer 'oa bet Breiz a zave
Peziou tud, peziou bugale ;
Bremañ, diwad ha didalve',
'Ve tammou tudigou 'vel-se,

Ge !

(an dorn rez e glin)

Poan an diaoul o weled ane⁶⁰.

Amzer 'oa bet Breiz a vage
Tiegeziou a garante' ;
Bremañ, 've lahadeg gante,
Bugale, gwazed ha gwrage',

Ge !

Diodet oll gand an hini kreñv.

Amzer 'oa bet Breiziz a ree
Korvadou jistr ha chufere ;
Bremañ 'prizont ken an traou-ze,
'Balamour, o treemn aze,

(An dorn war ar bruched)

Ge !

'Skrabont ket 'vel an hini kreñv.

Amzer 'oa bet hag e varve
Breiziz evdi o liberte ;
Bremañ 'vent gand an hini 'bae
Ha gand an hini 'vond enne,

Ge !

Ar brasa kovad hini kreñv.

(An dro diwezañ kaner⁶¹ muioh gorreg)

Amzer da zond, leh ma kane
Ken dudiuz war he menez,
Breiz a ouelo 'kichenn eur bez,
'N o luskellad he bugale,

Ge !

Lahet oll gand an hini kreñv !

T. ar Garrek.

En Plouigno, an unneg a viz Meurz 1901.

⁶⁰ ane : aneze.

⁶¹ kaner : poz.